



Diazez ar gentel

Ar pezh ho peus desket ouzhpenn

I. Kêriekadur ar bed ha levezon ar c'hêrioù er bedelaat p 24-25

a.Oc'hpenn 4,4 miliard a gêriz zo er bed: da lâret eo 57 % eus ar boblañs bedel e 2022; E 2050 hervez an ONU e vo 68% eus an dud é chom e kêr. Emañ ar c'hêriekaat unan eus efedoù ar bedelaat1: komzet e vez eus ar c'hêriekaat met dizingal eo kresk ar c'hêrioù:

-Er broioù diorret (Europa, Amerika Norzh) eo kroget ar c'heriekaat en XIX vet kantved hag e chom stabil bremañ lodenn ar boblañs er c'hêrioù (80% eus an dud).

-Er broioù àr ziorren hag er broioù àr eskoriñ (BRICS) eo kreñv-tre ar feur kêriekaat3. Meur a abeg a zispleg ar feur kêriekaat-mañ evel ar c'hresk poblañs4 hag an didudiñ diwar ar maez5. Niverusoc'h ha divent eo ar megapolennoù en Azia hag en Afrika; e 2015 21 megapolenn àr 28 e oa e broioù ar Su.

b.Hiziv e Lec'hioù ar bedelaat int : Desach a raont tud hag obererezhioù, embregerezhioù bras bedel (FTN)hag ur levezon o deus, brasoc'h pe bras, reve o galloud.

1=hollad darempredoù skoulmet etre rannoù disheñvel eus ar bed abalamour d'an eskemmoù (tud, marc'hadourezh, arc'hant ha titouroù)

2= doare ma vez kreizennet ur boblañs er c'hêrioù

3=ar feur kêriekaat : tregantad a dud a vev e kêr

5kuitaat ar maezioù evit beviñ e kêr = divaeziadeg

4diforc'h etre ar feur genel hag ar feur mervel

-broioù àr eskoriñ = bro get ul lañs ekonomikel a-dugarez da niver a dud uhel hag e lec'h ma n'eo ket uhel a-walc'h ar stuzioù beviñ enne. Àr-raok eh a ar re-se mes en un doare dizingal reve ar broioù.

II_ Spasoù kêr hag ardremezioù-kêr (gweledvaou-kêr) liesseurt mes heñval da sked ar branedenn

a. Get ar bedeladur eo hañval a-walc'h an holl gêrioù (aozadur, fonksionoù, ardremezoù):Frammet en an holl gêrioù tro-dro da **greiz-kêr***. Stank ha liesseurt eo **ar rouedadoù treuzdouden**** er spas-se, kevreet mat get ar bed.

En Europa, Azia pe Afrika e lec'h m'emañ kozh kozh ar c'hêriekaat eo anavet kreiz-kêr dre ur **glad kozh**, get kalz a vonumantoù. Er c'hêrioù nevesoc'h (Norzhamerika, Aostralia hag a-wezhoù en Azia), **karter an aferioù (CBD)** eo kreiz-kêr, aes da anaout get e skraberioù-oabl.

Kelc'hiet eo ar c'hreizennoù-kêr get **kurunennoù kêriekaat** : ar **bannlevioù** ha pelloc'h c'hoazh ar **spasoù trokêrel (an troàrdroioù (les périphéries))**. A bep sort gweledvadoù e c'heller gwelet enne.

b. Met eo disheñvel eo an ardremezioù hervez live beviñ an dud (o goprou) , o orin pe o relijionoù.

get doare savadurioù (tiez distag, savadurioù stroll, lochennaouegoù...) hag an obererezhioù staliet

(takadoù industriel, parkoù teknologel, kreizennoù-kenwerzh..) disheñvel. An **disparti sokio-spas** a raer a gement-se. Er broioù é tiorren pe er broioù àr eskoriñ e vez enebiezh etre **lochennaouegoù** bras e lec'h m'en em vod **paourentez** ha **disurentez** hag ar **c'harterioù cheuc'h ha gwarantet** evit ur vinorelezh pinvidik.

Àr gredvaat eh an dispartioù-se get kresk ar **bourc'hizaat (gentrification)** Karterioù zo a

*-Ar lec'h buhezekañ eo, e lec'h m'emañ an aveadurioù (*équipements*) hag

obererezhioù ar servijoù ekonomikel (bankoù, stalioù...) ha sevenadurel.

- kalon an eskemmoù bedel (marc'hadourezh, argant, titouroù, tud...).

** hub .

III. Metropolennoù tamm pe damm pe penn-dre-benn er bedelaat

a) Metropolennoù : kreizennoù gourc'hemenn ar bed, kevreet mat get ar rouedadoù eskemm bedel

Ur pouez bras o deus ar metropolennoù àr an **tachennoù demografel, politikel, ekonomikel ha sevenadurel**. Desach a raont a raont **tud hag obererezhioù** hag ur levezon o deus, brasoc'h pe bras, reve o galloud.

Ar metropolennoù-se zo **kalon an eskemmoù bedel** (marc'hadourezh, argant, titouroù, tud...).

a) Ar c'hêrioù bed, e penn ar bedelaat

Lies, ar c'hêrioù **enframmet** ar gwellañ er bedelaat a vez kavet e pinvikañ ha diorroetañ broioù ar bed. Evit ar re vrasañ anezhe, emaint strollet a-barzh tachadoù kêr bras, anvet **megalopolennoù**.

3 c'hreizenn er bed a stroll ar muiañ niver a vetropolennoù **kevreet get ar bedelaat** : _____. Se zo **enezeg ar metropolennoù bed** evit komz eus ar bodad savet gete.

Kevezerezh a sav ivez etre ar **c'hêrioù bed** en arbenn ag ar bedelaat. Kevezerezh evit degemer darvoudoù a bep sort, sportel ha sevenadurel, pe bout liammet get an hentoù kenwerzh bras.

a) Kresk dizingal enframmadur ar c'hêrioù er bedelaat


Diaes eo evit kêrioù ar **broioù é tiorren** kavout o flas e rouedadoù ar bedelaat ha **gwan e vez lies levezon** an darn vrasañ anezhe. Er **broioù diorroet** ivez, e c'hell bout kêrioù hag a zistera pe a ya **àr ziskar**, èl Detroit er Stadoù-Unanet lakaomp. Newazh e chom metropolennoù er-maez eus ar bedelaat evel kêrioù àr ziskar a chom liammet doc'h ar bedelaat atav e Afrika pe e Amerika ar Su, er-maez eus ar rouedadoù dezougen, en enkadenn ekonomikel pe er brezel. Lec'hiet int dre vras er Broioù paourañ ar Bed (_____: pays les moins avancés) ha merchet get kresk al lochennaouegoù. Gellet a ra **tapout ur lañs nevez** en ur ziorren obererezhioù nevez hag en ur wellaat he skeudenn a-drugarez da gempennoù bras dre raktresoù bras.



KENTEL-GREIZEK TEM 1: KÊRIEKAAT
AR BED



Pajennoù 46-47



Alc’hwez :	
I. Kêrioù enframmet mui pe vui er bedelaat	
	Kêrioù kevreet ar gwellañ, lec’hioù gourc’hemenn bras
	Kêrioù àr ziskar
II. Ur rouedad e par ar bed	
	Megalopolennoù bed

•Titl ar gartenn: